



SON AR GARANTE BARFET.

Var ton : *Ton humeur est*, etc.

An Den Yaouang.

LAQET eo en hor c'halonou
LAnez dezir d'en em garet :
Unan demeus hon ezomou
Eo ar Garante Barfet.
Destinet eo da bep-unan,
Gant eun urz leun a furnez,
E stat hac e chanç er bed-màn :
Darn zo contant, darn dies.

O compren gant l'attention
Qementse, hac o selaou
An ecleo demeus ar c'hanton ,
E respont ouz ar moeziou :
Me meus remerget o tremen ,
Gant eun êr guyê ha contant,
Dre va c'hichen eur femelen,
Pini a ra va zourmant.

Pa meus-hi güelet o tostât,
Oun commancet da grena ;
Bervi a ré ennôn va goad
Gant an aoun hac ar joa ;
Qer troublet e voa va speret,
Qen em boa poan o parlant ;
Gouscoude e meus discleriet
Evellen va zantimant.

Bonjour déc'h, femelen charmant,
Ha dign da veza caret ;
Ma ouffec'h e pez santimant

E moun-me en hoc'h andret ;
Ma halfec'h güelet an tourmant
Oc'h eus laqet em speret,
E teufec'h gant ampressamant
Da zoulaji va c'hlénvet.

Aboe ma meus ho hanavet
E concevis evidoc'h
Eun amitie hac eur respet
N'oufe qet beza brassoc'h.
Ret e ve dêc'h beza ingrat,
Ma na zeut eus ho costez
Da gavout anaoudeuez vat
A guement a garantez.

Ar Plac'h.

Tavit gant ho complimantchou
Hac ho fidelite vrás,
C'houi a suppos santimantchou
Ha n'oc'h eus santet biscoas ;
Rac m'ho piye, a gueit amzer,
Evidon-me concevet
Eun inclination sincer ,
C'houi ho piye dìn merget.

An Den Yaouanq.

Merget e meus dêc'h ho caren
Dre va fêçon da ober ;
Honnes eo ar güella moyen
Da dremen evit sincer :
Mes cresqi a ràn va zourmant ,
Dre eun discours qer cruel ;
E lec'h rîi dìn soulajamant ,
E teu't d'ober dìn mervel.

Ar Plac'h.

Den yaouanq , c'houi' c'heus preparet

Evel ma fot ho qentel ;
Mes n'en doc'h qet qen resolvet
D'en em lezel da vervel.
C'houi a fot dêc'h va abusi
Dre ho comzou studiet ;
Ma ven sot avoalc'h d'ho credi ,
C'houi' c'hoarzfe var va sujet.

An Den Yaouanq.

Plac'h yaouanq, mar carit sonjal.
E meur' boent eus va bue ,
E velfec'h, elec'h godissal ,
E laràn ar virione ,
Rac en pep seurt occasion
E meus roet dêc'h da gompreñ,
Dre an hirvoud eus va c'halon ,
Peguement en ho carrien.

Ar Plac'h.

Ne meus ho qüelet oc'h ober
Nemet 'vel meur a hini ;
Dibot eo ar voaset sincer
A eller da rancontri.
Cessit ta d'am importuni ;
Tavit gant hoc'h amitie ,
Ha ne zeut mui d'en em vanti
Gant ho fos fidelite.

An Den Yaouanq.

Oh na pebes tristidiguez !
O glac'har meurbet c'hoëro !
N'oun qet caret gant va mestrez :
Güell ve dîn beza maro.
An eol, dirac va daoulagad ,
Ne ro mui a sclérijen ,
Ha nemet er bez ne ven mad ,
En creiz an devalijen .

Ar Plac'k.

Truez a meus ouz ho qüelet
En eur glac'har quer grevus;
Ho calon a zo constristet,
Pe e zoc'h eun den tromplus.
Mes ma vouifen e vec'h sincer,
Den yaouanq, m'ho qemerfe
Eus a vremâ da zervicher:
Marteze me ho carfe.

An Den Yaouanq.

C'houi, va mestrez, c'houi a blich din,
Dreist qement zo er bed-màn,
Na biqen nicun na garin
Nemedoc'h-hu hoc'h-unan :
Qüittêt, qüittêt an daouetanç
Hoc'h eus var va c'harante :
Me en tou déc'h, en assuranç,
Biqen nemedoc'h n'em be.

Ar Plac'h.

Sant Pêr en d'oa d'e Vestr touet
Enep e adversourien,
Penos ne vije qet manqet
D'er zicour ha d'en difen;
Allas! ancouât a ras e le
Qent m'en d'oa ar c'hoc canet :
Ar Zant en devoa gousgoude
Teir goech e zianzavet.

An Den Yaouanq.

Sant Pêr en d'oa dianzavet
E Vestr mad dirac an oll;
C'houi ganén a zo quer caret,
Qen a rafen ar c'hontrol.
Dirac an oll dud assambles,

Me zo prest da zisclêrya
Penos eo c'houi sur va Mestrez ,
Va flijadur ha va joa.

Ar Plac'h.

Diganêc'h ne c'houlennâñ qet
E teufec'h da bublia
Ar pez biscoas n'oc'h eus sònjet
Marteze bete vremâ.
Güell e ve ganén e teufec'h
Dre eur sacrific benac ,
Da brouvi dìn sclér em c'harec'h
Gant eun intantion vad.

An Den Yaouanq.

Goulet diganén , va Mestrez ,
Ar sacrific a guerfet ;
Goulet, mar qirit, va buez,
Ne viot qet refuset :
Nemet ma ellin, qent mervel ,
Obien, epad va zourmant ,
Eus ho compassion eur zell ,
Ractal e varvin contant.

Ar Plac'h.

Den yaouanq, me a meus clévet
E voac'h eun den variant ,
Och eus , goude bout commancet ,
Torret meur' angajamant.
Birvigen , hac er lavarân ,
Ne recevin eur galon ,
E obtensi ma ne allân
Dre eur guenta donêson.

An Den Yaouanq.

Pa form Doue ar femelen ,
E crou prest eur pâr dezi ;

Mes pell • vent , mar en ordren ,
O daou en em rancontri .
Rac se eta , angajamant ,
Promessa hac amitie ,
Grêt ouz re-all , a zo neant
D'an eil evel d'eguile .

Ar Plac'h.

Bremân me vel patant ha sclêr
N'oc'h eus qen intantion
Nemet da dremen hoc'h amzer
Ouz va henti , va mignon .
Abret eta va dilezet ,
Ha retornit adare
D'an hini oc'h eus prometet
Da guenta ho carante .

An Den Yaouang.

Va Mestrez , credit a ellet ,
Ouz oc'h anavout qentoc'h ,
Va speret na bermetje qet
Carout nicun nemedoc'h :
Ha ma be ret dîn separi
Diouzoc'h , va c'harante ,
Ampoesonet gant an anui ,
Ne vo qet hir va bue .

Ar Plac'h.

Avoalc'h , avoalc'h , va servicher ,
Re e meus ho tourmantet ,
Rac bremâ me anavez sclêr
Peguement em cherisset .
Mar e meus grêt déc'h anduri
Eun trêtamant qer cruel ,
E voa evit hoc'h approuvi
Ha gout ha c'houi voa fidel .

An Den Yaouanq.

O distro leun a garantez
Hac a vir gompassion!
Ha possabl e ve, va Mestrez,
E ve touchet ho calon!
Beza' meus-me an esperanç
Da velet fin d'am poanniou,
Ha da receo ar recompanç
Demeus va oll hirvoudou?

Ar Plac'h.

Va mignon, sec'hit ho taelou,
Va Zervicher, me ho ped,
Hac en em cherissomp hon daou
Gant eur garantez barfet.
Eus va fers oc'h eus anduret
An diveza affliction:
Esperi a ràn e teufet
Da accordi dìn pardon.

An Den Yaouanq.

Evel ma ro ar gliz neve
Ar vuez d'ar yeot sec'het,
Ho comzou a deu evelse
Da zoulaji va speret.
Dre eun avis quer graciis,
M'e meus esper da veva,
Non pas hepqen eun den eürus,
Mes eun den an eürussa.

Ho torn em hini, va Mestrez,
Ha touomp dirac an Ee
Penos e vimp, hed hor buez,
Fidel an eil d'eguile.
Ne zònjomp mui en hor glac'har,
N'em garomp, ha ni gavo

Eur barados var an douar.
Dre hor plijadurezou.

Var an douar ne zeus netra
Qer douç hac an esperanç;
Alies e ra mui a joa
Eguet ar güir jouissanç :
Eur presant eo digant Doue.
Do zoulaji an natur,
Hac e ve hon trompa' rafe,
C'hoas e ra demp plijadur.

Roue an Ee hac an douar,
Me hanvez ho madelez,
Hac a rent dêc'h enor ha gloar,
Ha graçou a drugarez.
Dêc'h-u oc'h-unan eo dleet
Da guenta va c'harantez,
Goude-ze, mar er permetet!
He c'honservin d'am Mestrez.

C'houi, va Doue, oc'h eus formet,
Dre eun urz leun a furnez,
Eva da Adam da bried,
Hac o laquet assambles,
Plijet ganêc'h, Oll-Buissant
E ve dîn-me destinet
Ar femelen-mâ qer charmant,
Oc'h eus grêt dîn da garet.

FIN.